

Son ar C'henavo



War don.
For auld langsyne.

Diskan

N'eo nemet kenavo, breudeur,
N'eo nemet kenavo !
Ya ni 'n em gavo c'hoaz, breudeur,
N'eo nemet kenavo !

1

2

Dao vefe d'eomp en em guitaat (1)
Hep abeg a zistro ?
Dao vefe d'eomp en em guitaat
Hep gailout dont endro ?

Tresomp, war-gelc'h, brao, dor-en-dorn,
D'echui hon devez,
Tresomp, war-gelc'h, brao, dor-en-dorn,
Kudenn ar garantez.

3

Emunanet 'n eur chadenn goant,
Ni zeulo c'hoaz amañ,
Emunanet 'n eur chadenn goant,
Kenavo ar c'henta !

4

5

Ar skouerel (2) a ren ac'hanomp,
A vlen tud a-viskoaz,
Ar skouerel a ren ac'hanomp
Zeuy 'benn d'hor zastum c'hoaz.

Piou zilezfe e vignoned
Evit ankounac'haat,
Ankounac'haat e vignoned
Ha deizliou leun a stad ?

6

An heol a dro, an amzer gaer
A ya gwallbrim e-biou :
Stokomp hor gwer, Bretoned taer,
Sec'hed, yec'hed, — ha You !

Koz-Dour, 18--11-1945,
Herri AR BEG.



(1) Pe : Rêl vefe...
(2) Skouerel = uhel-skouer, uhel-vennad,
« l'Idéal ».

Son "Paotred ar C'hoad"

Son Paotred ar « Brezel kuz » : F.T.P.
hag F.F.I. eus Gwipavaz, Kêrhor, ar Fo-
rest ha Landelo.



Diskan

Sell'ta ! Brao-brao ! Paotred ar C'hoad
You, dir ha dir ha tan !
Sell'ta ! Brao-brao ! Paotred ar C'hoad
O vont holl d'an emgann !

O Breiz-Izel, o kaera bro,
Kinklet c'houek ha dispar !
O Breiz-Iizel, o kaera bro,
Plou glaskfe ho tiskar. ?

Piou'ta glaskfe naska tud Vreiz
Ha krenna berr o fri ?
Kentoc'h ni 'n emganno noz-deiz,
Hep kousket na debri !

Tan zo war vor, tan zo en êr
Hag e pep korn d'ar bed :
An drouk-spered, 'n em c'hraet boser
Lak an holl war o led.

Eur c'haoleg têt, hanvet Hitler,
Gra eus Breiz eur garniel !
War zao, paotred, ha dir en êr !
Harp d'hor mamm Breiz-Izel !

Pétain, Laval, ha ped Judas
Deus gwerzet hon enor.
Ar groug vo gopr an dud ganas
E Frans hag en Arvor !

C'houezomp an tan war bep menez,
C'houezomp tan ar brezel !
« Tantez-argad 'lein ar menez »,
Gant lorc'h zeu d'hor gervel.

O Bretoned, ni tud kalet,
Daoust ha ni vo trec'het ?
'Vit Breiz dalc'hmat ha Frans b'pred,
D'ar c'hoad, d'ar c'hoad, paotred !

Kerse vezo ganit Hitler,
Mevel bras an Ankou !
Ni 'n em zisdleo war da ler,
Ha war ler da ziaoulou !

Meur a vil « Boch » ne 'z aint ket kuit :
Va c'hleze zo ruz-gell !
O gwad a ruilh ! Va bro, bevit !
Bevit, o Breiz-Izel !

Frans ha Breiz-Izel, 'vel diou c'hoar,
A gerz brao, dorn-ha-dorn,
Baz d'an trubard, d'an den digar
Deus gwerzet park ar forn !

Diskennet ez int d'an ifern
Mac'herien Frans ha Breiz !
Baz ar garniel 'maint, vern-ha-vern,
Boued-kon ha boued-ar-bleiz !

Diskan-diweza

Setu aman Paotred ar C'hoad !
You ! dir ha dir ha tan !
Setu aman Paotred ar C'hoad,
Ganto maout an emgann !

AR GWIR-GILHOG,
barz Landelo

